

# BACCALAURÉAT TECHNOLOGIQUE

SESSION 2009

**BRETON**

LANGUE VIVANTE 2

Série STG (Sciences et technologies de la gestion)

Spécialité « communication et gestion des ressources humaines » Coefficient 3

Spécialités « comptabilité et finance d'entreprise » Coefficient 2  
« gestion des systèmes d'information »  
« mercatique »

**Durée de l'épreuve : 2 heures.**

*L'usage de la calculatrice et du dictionnaire n'est pas autorisé.*

**Dès que ce sujet vous est remis, assurez-vous qu'il est complet.  
Ce sujet comporte 3 pages numérotées de 1/3 à 3/3.**

Compréhension	10 points
Expression	10 points

### **Miz Mae 1968 e lise Landreger**

E penn-kentañ miz Mae 1968 e oa lise Landreger ul lise sioul en ur gêr vihan vorgousket. Staliet e oa hemañ abaoe penn kentañ an ugentvet kantved er c'hloerdi kozh e-lec'h ma oa bet skoliataet gwechall Yann-Frañsez ar Gonideg, Ernest Renan, Jarl Priel ha meur a hini all. E 1968 e oa kalz re vihan al lojeiz evit ar pevarzek kant skoliad bennak a labourer ennañ (kentañ kelc'hiad, eil kelc'hiad ha skolaj teknik), setu e oa bet savet barakennoù e-barzh ar porzh ha betek war Plasenn ar Republik.

Anvet e oamp bet e Landreger, ma gwreg ha me, e miz Here 1965. Setu hon doa bet amzer da ober anaoudegezh gant ar gêr ha gant an dud ha zoken da gemer perzh e labour kevredigezhioù evel Kelc'h Sevenadurel Ernest Renan.

10 Pa soñjan e miz Mae 68, e teu em spered amzer kaer-meurbet, tomm zoken, harz-labour ha manifestadegoù, bodadegoù hir-hir, divizoù diaes da lakaat en implij a-wechoù, met ivez birvilh, startijenn, laouended, ha fiziañs en un amzer da zont evurusoc'h evit an holl.

Gwir eo e oa yaouank an darn vrasañ eus ar gelennerien d'ar mare-se e Landreger. Nevez deuet eus ar skol-veur peuruiañ. A bep seurt orin e oant ivez : Bretoned, Okitaned ha « Treid-du » advroellet<sup>1</sup>.

Buan e savas bec'h etre ar gelennerien hag ar rener. Ar Bigouter-mañ<sup>2</sup>, bet klasket gantañ mont da zanvez-ofiser e Saint-Cyr<sup>3</sup>, stummet e mod kozh, a oa reut-tre evit pezh a selle ouzh ar genurzh. Gwelet a rae dizurzh e pep lec'h. Ar pezh ne veze ket rak frammet mat e voe an traoù etre ar gelennerien, ar skolidi vras ha darn eus ar gerent ha ne voe na displantadeg pavezioù, na bardelloù<sup>4</sup>, na bastrouilhadur, na tamm distruj ebet.

Ur strolladig kelennerien ha skolidi vras, ar « piked grev », a chome e toull ar porzh evit dizaliañ an dud da zont da labourat e-pad an harz-labour. Met hir e voe hemañ ha tamm-ha-tamm e kavas gwelloc'h d'ar skolidi ha da lod eus ar gelennerien mont d'an aod goude kreisteiz, ken brav ma oa an amzer. Ret eo gouzout ivez n'o doa ket gelllet mont alies d'ar mor er bloaz a-raok dre avani da beñse an Torrey-Canyon<sup>5</sup>. « Dindan ar pavezioù an draezhenn » eme studierien ar c'harter latin e Pariz. E Landreger e vije bet posupl dezhe lavaret : « Nepell eus ar pavezioù an traezhennoù. » [...]

Manifestadegoù a veze bemdez gant ar skolidi vras eus Plasenn ar Republik betek ar porzh-mor, mont ha dont. Bez e voe ivez manifestadegoù brasoc'h. Soñj am eus eus unan anezhe un tamm a-raok pardon Sant Erwan a veze lidet d'ar c'houlz-se d'an 19 a viz Mae, n'eus forzh peseurt deiz e tegouezhe. Ur bern tud a oa er vanifestadeg-se : liseidi, eveshaerien, kelennerien, skolaerien, kerent, met ivez micherourien hag implijidi. Un dra souezhus ivez : e penn an dibunadeg, asambles gant pennoù sindikajoù al lise, e kerkze abad rener skol labour-douar Peurid-ar-Roc'h ha d'e heul un toullad kelennerien ha skolidi eus ar skol brevez-se. Traoù evel-se ne vezent ket gwelet a-raok.

40 Pa erruas ar vanifestadeg war Plasenn an Iliz-Veur, ar re yaouank o huchal « A bas la dictature ! », « Les ouvriers avec nous ! » hag ar re goshoc'h « Pompidou, des sous ! » e voe klevet, skignet a-bouez-penn gant uhelgomzerioù, diskan ar c'hantik brudet : « Na n'eus ket en Breizh, na n'eus ket unan, na n'eus ket ur sant evel Sant Erwan. » Pebezh abadenn !

Diwar Fañch Peru, « ar Vretoned ha miz Mae 68 », *Brud Nevez* n°268, miz Mae 2008

<sup>1</sup> Treid du advroellet : tud o tont eus an Aljeri ha distroet d'ar Frañs.

<sup>2</sup> Ur paotr eus ar vro vigoudenn.

<sup>3</sup> Ur skol ofiserien brudet.

<sup>4</sup> bardelloù : barricades

<sup>5</sup> Ur vag karget a betrol a oa kollet e 1967 e-tal Enez Eusa.

## **A Compréhension du texte - Kompren an destenn (10 points)**

*Respont bewech gant ur frazenn d'an nebeutañ.*

- a) Petra a oa c'hoarvezet e miz Mae 1968 er Frañs ?
- b) Peseurt doare lise a oa e Landreger ?
- c) Eus Breizh e oa an holl gelennerien d'ar mare-se ?
- d) Perak ez eus bet savet jeu etre ar rener hag ar gelennerien ?
- e) Daoust hag-eñ e oa ken kreñv an traoù e Landreger hag e Pariz ? Perak ?
- f) Petra a rae ar gelennerien hag ar skolidi e-lec'h mont d'ar skol ?
- g) Peseurt tud o doa kemeret perzh er vanifestadeg an tamm a-raok an naontek a viz Mae ?
- h) "Traoù evel-se ne vezent ket gwelet a-raok" (linenn 35), displegit.
- i) Diwar an huchadennoù a voe klevet war Plasenn an Iliz-Veur, evit peseurt abegoù e oant o stourm, d'ho soñj ?
- j) Displegit e brezhoneg petra a dalvez ar gerioù-mañ :
  - dizaliañ (linenn 22 )
  - a-bouez-penn (linenn 38 )

## **B Expression écrite – Emzispieg (10 points)**

Dibabit ur sujed ( 200 ger ) e-touez an tri-mañ :

Sujed 1 : Evit petra e vefec'h gouest da stourm ? Displegit.

Sujed 2 : Ha kemeret ho peus perzh en ur vanifestadeg vras e-giz-se dija ? Kontit.

Sujed 3 : "Ret eo gouzout ivez n'o doa ket gellet mont alies d'ar mor er bloaz a-raok dre avani da beñse an Torrey-Canyon" : ha penaos e vefe tu da labourat evit an diorren padus bremañ?